


Fañchig Kouer

Niv. 3

Ar gelaouenn bedagogel evit ar re yaouank 7-11 vloaz

An tomatez,
hervezout,
frouezh pe
legumaj ?



Pajenn 2

**Hag anavezout a
rez ar gouennoù
tomatez ?**

Pajenn 3

**Perzhioù mat
an tomatez
evit ar c'horf**

Pajenn 4

**Kelc'hiad
naturel an
tomatez**

Pajenn 8


**Keginañ
tomatezennoù**

Piv on ?

- ✓ A orin eus Perou on
- ✓ Meur a liv am eus
- ✓ Me zo ront
- ✓ An heol a blij din
- ✓ Alies ne oar ket an dud hag-eñ on ur frouezhenn pe ur seurt legumaj
- ✓ Meur a zoare zo da zebriñ ac'hanon : evel saladenn, en hilienn, e chug pe e koñfitur zoken !

Ha gouzout a rez ?

14 kilo
tomatez a vez debret
bep bloaz gant pep
tiegezh e Frañs



Hag anavezout a rez ar gouennoù tomatez-mañ ?

Dit da notenniñ an niverenn a ya gant pep gouenn tomatez

Diskoulmoù pajenn 8


- 1 Tomatez a-gropadoù
- 2 Tomatez ront
- 3 Tomatez kalon ejen
- 4 Tomatez kornek an Andoù
- 5 Tomatez ananaz
- 6 Duennoù Krimea
- 7 Tomatez kerez
- 8 Tomatez Marmande
- 9 Tomatez Green Zebra



Dastum an tomatez

A viz Mae da viz Gwengolo
emañ an uhelamzer

Tomatez a c'haller kaout a-hed ar bloaz memes
tra ma vezont gounezet dindan un ti-gwer.



Genver / C'hwevrer

Meurzh / Ebrel

Mae

Un tamm Istor-Douaroniezh





A orin eus Suamerika eo an tomatez, ha dont a ra o anv diwar "tomatl", ur ger aztekek. Degaset e oa bet da Europa er 16vet kantved, ha lesanvet "pomodoro" a dalvez "aval aour" en italianeg. Er penn-kentañ e soñje d'an dud e oa binimus an tomatez hag implijet e vezent evit kinklañ al liorzhoù. En 18vet kantved e voe krog an dud da geginañ anezho. E Frañs e oa Provañsiz ar re gentañ o tebriñ tomatez, implijet evit fardañ hilienn. D'ar mare-se e veze gounezet an tomatez e parkoù dindan an amzer dreist-holl. Bremañ e c'haller kutuilhañ tomatez a-hed ar bloaz ma vezont plantet e-barzh un ti-gwer.

Skiantoù-Yec'hed

Debriñ tomatez zo mat evit ar c'horf e meur a geñver.

Kalz a vitamin C zo enno. Mat eo evit chom hep bezañ klañv hag evit poazhañ kaloriennoù. Mat eo da zouraat ar c'horf peogwir ez a dour d'ober al lodenn vrasañ eus un domatezenn. Ouzhpenn-se int ivez frouezh mat evit ar c'hroc'hen hag enep ar roufennoù.

Danvezennoù un domatezenn



Breizh



Broioù
al Liger

Ar rannvroioù
a brodu ar
muiañ e Frañs


Provañs-Alpoù-Aod
an Azur



Ha gouzout a rez ?

660 000
tonennad tomatez
a oa bet produet
e Frañs e 2020.

Ar produer tomatez kentañ
en Europa eo Italia :
e-tro 6 milion a
donennadoù bep bloaz !



Mezheven

Gouere

Eost

Gwengolo

Here / Du / Kerzu

Petra eo kelc'hiad naturel an tomatez ?



Ha gouzout a rez ?

Ouzhpenn 9000 gouenn tomatez zo. An hini devañ zo 3.5 kg anezhi !

Hadañ a reer ar greun tomatez en douar pe en ur voundenn (ur gwelead magus ma planter struzh) ha diwan a reont. Diwar neuze ez a gwriziennoù en douar ha deliennigoù a ziwan, evit klask gouloù : un hadeg eo.

Goude-se e kresk ar plant ha produiñ a ra deliennoù brasoc'h ha niverusoc'h evit gallout bleuniañ. Ur wech pollenet gant ar gwenan e troio ar bleunioù e tomatez.

Hervez al louzawouriezh ez eus frouezh eus an tomatez peogwir e teuont diwar bleunioù. Heñvel eo evit an avouez, ar berjinez, ar c'hokombrez, ar skilbebr hag ar pimant, ar c'hourjetez, ar fav glas pe c'hoazh an olivez. Keginomp ha debromp anezho-holl !

Bleuniaoua a ra ar gwenan hag ar sardon



Hadañ a reer ar c'hreunenn



Keginañ

Rekipe Fañchig Keginer : saladenn an hañv

Ma fell dit mirout blazioù c'hwek un domatezenn vat eo gwelloc'h leuskel anezhi e-maez ar yenernez.

Dit-te da fardañ da rekipe gant Jul ha Lena !

AOZENNOÙ :

Tomatez
Saladenn
Comté
Kokombrez
Olivez du
Eoul olivez
Gwinêr



Ar saladenn wellañ eo ma fell dit kaout boued fresk pa rez regezerioù e-pad an hañv. Ganti e tebrer un darn eus ar 5 frouezh ha legumaj a vez ezhomm da zebriñ bemdez.



Salud dit, Fañchig Kouer, ma anv zo Tanguy !



30 vloaz on ha produour frouezh ha legumaj on e Trelêvern en Aodoù-an-Arvor. Gant ma breur hon eus 1 hektar evit gounit tomathez hepken. Labourat a reomp a-hed ar bloaz gant 8 den all evit gounit tomathez diwar gouennoù a bep seurt herkent ha ma vez krog ar mare.

PENAOS E VEZ GOUNEZET TOMATEZ ?

Ur gwir strategiezh da lakaat da dalvezout eo. A-raok plantañ anezho e rankomp soñjal mat er gouennoù a vo dibabet : ar plantoù a c'hall kaout ul levezon hag efedoù an eil re war ar re all. Goude-se eo dav plantañ anezho d'ar poent mat ha bezañ sur e kreskont mat ma fell deomp dastum o frouezh goude. A-hed mare an tomathez e klaskomp implijout nebeutoc'h a broduioù tretañ.

Da skouer e staliomp ruskennoù gant sardon enno abalamour da aesaat ar pollenañ. Pa vez krog mat ar mare e tilaokomp amprevaned preizherien, dezho da zebriñ an amprevaned noazus. Klask a reomp en em soñjal war ar modoù poellek da labourat asambles gant an natur.

PESEURT GOUENN TOMATEZ A GAVEZ AN HINI WELLAÑ ?

Katy Rose, hep mar ebet ! N'eo ket brudet tamm ebet ha domaj eo rak n'eus ket par d'he blaz.



Gwir pe gaou ?

Gra ur groaz er c'harzennoù a zere ! Diskoulmoù pajenn 8

- 1 ▶ Ouzhpenn 10 kg tomathez a vez debret bep bloaz gant pep tiegezh e Frañs
- 2 ▶ An tomathez zo ruz bepred
- 3 ▶ Leun a zour, a c'hlukid, a wiennoù, a vitamin C hag a galiom eo an tomathez
- 4 ▶ Ne c'haller ket keginañ kalz meuzioù gant tomathez
- 5 ▶ N'eus nemet un nebeud kantadoù a ouennoù tomathez
- 6 ▶ E Frañs eo en Enez-Frañs e vez produet ar muiañ a domatez
- 7 ▶ Mat eo an tomathez evit ar yec'hed
- 8 ▶ A orin eus Spagn eo an tomathez
- 9 ▶ An Italianed a rae "pomodoro" eus an tomathez, ar pezh a dalvez "aval aour"
- 10 ▶ Frouezh eo an tomathez

GWIR **GAOU**



Ar boued a c'haller fardañ gant tomathez

Hilienn



Tomatez farset



Koñfitor tomathez glas



Tartezennoù




Beriadoù digor-kalon



Livañ





























gant Jul ha Lena



An dro-lavar

Pa vez unan bennak o rusaat...

Skrivañ al lizherenn a glot gant pep arouez ha diskodiñ ar frazenn. *Diskoulmoù pajenn 8*

														
T			O	R		Z	E	V		L	U			
														
D		M	A					N	-	G		R		Z


C'hoarioù

GERIOÙ mesket




Dreistlinennañ pe kelc'hiañ war ar gael ar gerioù kinniget amañ dindan :

BOUED	TROADENN
ENEBOXSIDER	KALIOM
BREIZH	HILIENN
DEBRIÑ	TOMATEZ
GWIENNOÙ	GOUENN
GASPACHO	RUZ
GREUNENNOÙ	MAE
DOURAAT	GLAZ
MEZHEVEN	HAÑV



R	H	Z	I	E	R	B	U	R	U	Z
E	G	A	S	P	A	C	H	O	T	U
D	W	R	M	E	Z	H	E	V	E	N
I	I	D	E	B	R	I	Ñ	B	U	N
S	E	O	M	U	Z	U	E	O	H	E
K	N	U	A	H	N	Z	U	U	K	I
O	N	R	E	V	A	E	Z	E	A	L
B	O	A	Ñ	L	I	I	N	D	L	I
E	Ù	A	G	O	U	E	N	N	I	H
N	H	T	I	Z	E	T	A	M	O	T
E	T	R	O	A	D	E	N	N	M	Ù



English exercise

Liammañ pep ger ouzh e droidigezh saoznek. *Diskoulmoù pajenn 8*

- Tomatezenn
- Bleuñvenn
- Gwenanenn
- Ruz
- Glaz
- Legumaj
- Gwrizienn
- Ti-gwer

- Green
- Greenhouse
- Vegetable
- Tomato
- Red
- Flower
- Root
- Bee

